

# bremañ

**ECOLE du POAN BEN  
MATERNELLE**



**LEZENN  
AR  
GALLEG  
ER  
SENAD**

Arvar evit ar  
yezhoù bihan

**DIWAN**  
adsav lezennel  
6 miz ouzhpenn

**SIVOM AR  
BAOL**  
Aferioù lous

**TEULIAD AR MIZ  
"DISKOULM  
DIWEZHHEL" E  
KURDISTAN**

**GOUEL  
BROADEL AR  
BREZHONEG**



Roazhon d'an 18 a viz Ebrel, Evezhiadennoù fur diwar-benn ar raktres pemdezieg e brezhoneg a oa bet graet gant Olier ar Mogn e niverenn miz Ebrel Bremañ.

Nec'het on-me pa welan an implij eus ar sifroù e pennad Heklev (e-barzh Bremañ miz Meurzh). Diwar 500 respont d'ar c'houlennadeg e laker e vo 3000 lenner (sifr meneget en ur c'helc'hlizher a-berzh Heklev). Karout a rafen kompren penaos e c'hallfe ur pemdezieg sachañ muioc'h a lennerien eget ur mizieg evall Bremañ. (Ne vefe ket fall embann e-barzh Bremañ niver ar goumananterien)."

UR SKWER FALL

Nec'het on ivez pa welan tud Heklev o'ch ober dave d'ar "Punt", ar sizhuniég "katalanek", evit krouiñ ur pemdezieg e Breizh.

Koumanantet on d'ar "Punt" abaoe meur a vloaz. Gwelet em eus ur sizhuniég e katalaneg penn-da-benn o vont divyezhek, o kemm he stumm, o vont e galleg war ar golo, evit gounit lennerien c'hallek, hag o koll he lennerien gatalanek.

Nec'het on gant ar skwer-se, muioc'h c'hoazh pa welan an niverenn diwezhañ (ha ne vo hini ebet ken war he lerc'h) : PUNT FINAL war ar golo.



DIVYZHEGEZH : DIBADUS

Fellout a ra da Heklev krouiñ ur "media bras". Krouiñ unan bihan ne ve ket fall da gentañ. Kemer kentel a zlier diwar istor c'hwitadenn "Le Canard de Nantes à Brest", a ziskouez n'eo ket asur

an trec'h, ha skouer "Enbata" en Euskadi, a ro a-wechoù gwelloc'h keleier a-zivout Breizh eget hor pemdezieg ordinal. Klask krouiñ ur pemdezieg a-raok ur sizhuniég zo bezañ gant selloù brasoc'h eget ar bouzelloù. Ne vern e pe yezh e ve.

Ha techet on da soñjal, mar komprenere eo kelaouiñ a zo d'ober a-raok pep tra, eo ur sizhuniég c'hallek a zo ar muiañ ezhomm evit ar poent e Breizh, evit talañ ouzh spered enepbreizhat ar media all. Kement-se avat n'eo ket labour ar vrezhonegerien, hini an holl Vretoned ne laran ket.

Evit ur gelaouenn divyezhek, dezhi da bal rastellat lennerien en div yezh, e tiskouez din anat skwer "El Punt" n'eo ket padus an divyezhegezh rak lennerien zo ne zeuint ket, pellat ma vint gant ar yezh-spontail all, pa n'int ket evit he lenn.

SKINGOMZ

Lenn a ran e pennad Heklev eo "ar c'hazetennoù an daare aesañ da gelaouiñ bemdez e brezhoneg". N'eo ket. Ar skingomz eo.

Ha pa welan e vo ezhomm 30 den implijet evit derc'hel ur pemdezieg en e sav n'on ket evit mirout a soñjal ne vefe ket ezhomm kement a dud gant ur skingomz. Lavarout a ra dimp Heklev : "emañ ar skingomz e daouarn ar stad". Skingomz ar stad, ya. Krouiñ hon hini a c'hallomp ober ivez. Aze da vihanañ, ouzhpenn hini ar skolioù gant Diwan, hon eus skwerioù padus en Euskadi, hag e Katalonia, gant Radio Arrels.

Mark Kerrain

(\*)setu sifroù diwezhañ Bremañ : 450 den koumanantet, 100 skwerenn dasparzhet ha tro 200 skwerenn gwerzhet er stalioù-levriou.

GALV !

Emaon o klask ur post arbennour e Roazhon evit miz Here/miz Du 1994. Plij a ralo din labourat en ur gevredigezh a sell ouzh sevenadur, istor, yezh Breizh. Skrivit din :

Lionel Henry  
3, square Colmar  
35000 ROAZHON

PELLELADENN

Kemper d'ar 24 a viz Ebrel Souezhet omp bet gant lizher Olier ar Mogn en niverenn 151, o reiñ da gompren ne grede ket kalz e raktres "Heklev" da sevel ur gelaouenn divyezhek.

Ne vefe ket gounit tachenn d'ar brezhoneg sevel ur bemdeziek, ha pa vefe un hanter diouti e galleg ?

Ha tamall a vije graet, d'an dud yaouank bet divizet ganto deskiñ ar yezh, labourat ganti hag eviti ?

Hag ur fazi eo bet, 20 vloaz 'zo, krediñ e oa milieroù a dud o c'hortoz skolioù brezhoneg evit o bugale, pe panelloù divyezhek war vord an heñchoù ?

Plas a zo, d'hor soñj, evit ur gelaouenn a blifje d'ar ve yaouank, pe d'ar re bet o teskiñ ar yezh, pe d'ar re n'ouzont ket brezhoneg c'hoazh !

Labour 'zo evel just, met n'omp ket nemet huñvreerien, ha prest da zegemer mennozhioù c'hoazh.

T.Etorre, M.Beyer, C.ar Skourr, R.Thiriart, D. ar Gall.

MARV BRENDA WOOTON

Mervel a reas Brenda Wooton, ar ganerez eus Kernev-Veur e miz Meurzh diwezhañ. Setu amañ ar pezh a voe skrivet diwar he fenn war niverenn miz Ebrel ar gelaouenn viziek "An Gannas" (=Ar C'hannad) :

"Trist-tre e voemp holl pa glevjomp e oa marvet Brenda Wooton e miz Meurzh. Trugarez a ranker lavaret dezhi evit he labour evit Kernev-Veur hag he yezh.

Gant he mouezh vrvav, gant he c'harantez ouzh he bro ha gant ar c'hanaouennoù skrivet gant Richard Gendall ez eas Brenda, ugent vloaz zo, dre ar bed holl, ha lakaat a reas Kernev-Veur da vezañ anavezet hag ar c'herneveg da vezañ klevet.

Brenda a zigoras deomp an dorioù, diskouez a reas deomp un hent a c'helle bezañ heuliet gant tud yaouank war he lerc'h, ha d'ar mare-se e krogas an tonioù hag ar c'hanaouennoù kernevek d'en em ledañ muioc'h eget a-raok.

Mouezh Brenda a chomo e spered ar re a c'hanomp he c'hlevas o kanañ, ha delc'her a raomp soñj ivez eus he levezeg hag eus he c'hoazh. Dalc'het e vo koun eus he buhez hag he oberiantiz".

# Lezenn ar galleg er Senad ARVAR EVIT AR YEZHOU BIHAN

Votet ez eus bet gant ar Senad e Paris e penn-kentañ miz Ebrel un danvez-lezenn kinniget gant ministr "ar Sevenadur hag ar galleg", an Aotrou TOUBON. E miz Mae e tremeno dirak an deputeed. E bal : stourm ouzh levezon ar saozneg. E gwirionez, ur gwall-daol e vefe al lezenn-se evit ar yezhoù bihan e Frañs. Korsiz, Elzasiz, Katalaniz, Okitaniz, Euskariz ha Breizhiz o deus savet o mouezh a-enep. Savet o deus zoken ur "Chuzul Meur Broadel evit ar Yezhoù Rannvro" diwar atiz ar senedour Elzasat an Aotrou GOETSCHY.



38 kevredigezh a-enep

Ar c'homzoù flour distaget gant an aotrou Toubon diwar-benn ar yezhoù bihan, koulz hag ar mellad 19 n'int ket evit o sioulaat pa embann "ne dalv mennadù al lezenn-mañ, nemet kement ha ma ne enebont ket ouzh al lezennoù ha reolennoù o plediñ gant ar yezhoù rannvro". Gwir eo, eme ar c'huzul Sevenadurel, "ken dister eo al lezennoù evit ar yezhoù bihan, lezenn Deixonne 1955 dreist-holl, hag ar reolennoù n'eus anezho nemet lizhiri a-berzh ministrerezh an Deskadurezh peurlvuiañ, ma n'eo ur seurt mellad nemet un touell."

38 kevredigezh e Breizh, gant ar c'huzul Sevenadurel, o deus savet ur mennad a-enep da zanvez-lezenn Toubon. Da holl senedourien ha deputeed Bro-C'hall eo bet skrivet gant ar c'huzul, da c'houlenn outo chom hep votiñ al lezenn, hep bezañ

cheñchet da vihanañ, en doare da zifenn gwirioù ar yezhoù bihan a-enep lanv ar galleg. "N'eo ket ar galleg a zo en arvar amañ," a lavar ar c'huzul, "ar yezhoù bihan ne lavaromp ket." N'eo ket bet diaes d'ar c'hevredigezhioù merkañ an dislavar a zo etre ar youl embannet da zifenn liester ar sevenadurioù hag ar yezhoù, hag ar berz a vefe lakaet war ar yezhoù estreget ar galleg e Bro-C'hall : ar galleg eo a vefe lakaet diaes ma vefe seurt lezenn e Bro-Ganada da skouer, pe e Bro-Italia e traonienn Aoste.

Kuzul-meur ar Yezhoù Bihan

Noazus e c'hell bezañ al lezenn ivez evit deskiñ yezhoù estren ; daoust ha ne vefe ket miret ouzh skolioù Diwan da implij saozneg pe yezhoù all da gelenn danvezioù zo evit peurzeskiñ ar yezhoù-se ? Ne vefe nemet bugale familhoù pinvidik hor mistri vras a c'hellfe kaout seurt deskadurezh

Politikerezh

dre ma c'hellfent bezañ kaset da studiañ e-barzh skolioù en estrenvro.

En diavaez da Vreizh eo bet kreñv ivez ar from. Komite Bro-C'hall Burev Europa ivez en deus kaset e soñj da holl zeputeed ha senedourien Bro-C'hall. Er senad en deus an Aotrou Henri GOETSCHY, senedour a Vro-Elzas, aozet un emvod d'ar 5 a viz Ebrel evit prientiñ ar stourm da cheñch al lezenn. Eno e oa bet bodet dileuridi eus pep bro dezho ur yezh vihan hag un nebeud senedourien ha deputeed, en o zouez an Ao. Alphonse ARZEL ha skoazeller an Aotrou Loeiz ar PENSEG eus Breizh.

War-un-dro en deus an Aotrou GOETSCHY kinniget sevel ur gevredigezh nevez, disklêriet hervez ar gwir elzasat, e bal kemer plas "Kuzul Broadel Yezhoù Frañs", savet gant an Aotrou FABIUS pa oa kentañ ministr. Morse n'en deus ar c'huzul-se, savet gant gouarnamant Bro-C'hall, graet an disterañ labour. "Ar C'huzul-Meur Broadel evit Yezhoù Rannvro Frañs" a vefe savet gant dileuridi, deputeed, dilennidi dre vras o tont eus ar broioù e-lec'h ma vez komzet ur yezh vihan. E ober kentañ a zo bet goulenn ouz ar I.F.O.P. sevel un enklask e-touez ar Frañsizien da c'houzout petra soñjont diwar-benn ar "yezhoù rannvro" (gwelout an disoc'hoù pelloc'h) -

"An aotre da implij ar yezhoù rannvro"

D'an 12 a viz Ebrel eo kroget an emgann er senad. Difennerien ar yezhoù bihan o deus rediet ar

ENKLASK AN I.F.O.P. :

77% eus ar Frañsizien a-du gant ul lezenn evit ar yezhoù rannvro.

Un enklask graet gant an I.F.O.P. evit Kuzul Meur Broadel ar Yezhoù Rannvro a ziskouez emañ a-du ar Frañsizien da zifenn ar yezhoù rannvro. 93% anezho a soñj ez int lod eus glad Frañs, 13% ez int yezhoù estren. 12% a soñj ez int un arvar evit ar galleg, 74% a soñj ez eo pouezus pe bouezus a-walc'h o difenn, ar re yaouankañ dreist-holl : 79% etre 18 ha 24 bloaz, 80% etre 25 ha 30 bloaz. Al labourerien douar (80%), an implijidi (79%), hag ar vicherourien (79%) eo ivez a zo a-du gant ar soñj-se. Ne vo ket souezh eta gwelet eo muioc'h tud an tu kleiz (80%) eget an tu dehou (67%) a gaver. Ar feur uhelañ a zo gant ar P.C.F. (90%) ar pezh ne glot ket dre ret gant soñj ar strollad penn-da-benn.

Evit ul lezenn war ar yezhoù bihan e kaver 82% eus an dud a gleiz ha 71% eus an dud a zehou.

Ur goulenn all a oa ivez diwar-benn an aozadurioù a rankfe difenn ar yezhoù-se : evit 45 % eus an dud eo d'ar Rannvroioù d'hen ober, evit 24 % anezho d'an Departamantoù, evit 15 % d'ar C'humunioù, hag 8 % hepken a gav dezho e tle ar Stad ober un dra bennak ; war-dro 25 % a dud zo ivez a soñj ez eo labour an aozadurioù skingomz ha skinwel, ur sifr heñvel evit Ministrerezh ar Sevenadur pe evit Ministrerezh an Deskadurezh



gouarnamant da respont di-baouez d'ar goulennoù ha da arguzenniñ war ar reizhadurioù kinniget gant an Aotrou GOETSCHY, skoazellet gant meur a senedour all. A-raok an diviz er Gambre en deus ranket zoken an Aotrou TOUBON en em zifenn da vezañ c'hoant mougañ ar yezhoù bihan. Daoust da-se ne embann ket en deus c'hoant kas war-raok ar yezhoù-se : ne gomz nemet eus "statu-quo" en o c'heñver. Re luziet e vefe, hervezañ, sinañ Skrid-Diazev Europa ar Yezhoù Rannvro pe Minorez.

Nebeut-tre a reizhad-dennoù a zo bet votet er Senad evit d'erc'hel kont eus ar yezhoù bihan. E gwirionez n'eus bet graet nemet lakaat ar "yezhoù rannvro" war renk ar yezhoù estren er mellad 9 : ne vefe tu da implij ar "yezhoù rannvro hag estren" en deskadurezh ne-met evit o cheñch. Diouzh un tu all eo bet ouzhpennet er mellad 19 ne ya ket al lezenn a-enep da "implij ar yezhoù-rannvro."

Un dislavar

Gwall dreut an di-soc'h, ha dañjerus zo-ken, pa weler a-hend-all eo bet gwashaet an danvez-lezenn gant melladoù nevez : un anezho o rediañ da dreñ e galleg pe e yezhoù all, evit an

douristed, "an enskrivadurioù e yezhoù rannvro er gouelloù sevenadurel hag en anvioù tennañ d'ar meuzioù rannvroel", hag unan all oc'h embann, er penn-kentañ ez eo ar galleg "yezh an deskadurezh, al labour, an eskemmoù hag ar servijoù publik." Ar reizhad-se, kinniget gant an Aotrou Legendre a ra eus implij yezhoù estreget ar galleg un ober enep lezenn en darn vrasañ eus ar vuhez kevredigezhel. Ha kement-se e dislavar gant ar reizhadenn a zo bet degemeret er mellad 19, a lavar "ne dalv al lezenn-mañ nemet kement ha ne ya ket a-enep al lezennoù hag ar reolennoù o tennañ d'ar yezhoù rannvro hag a-enep o implij."

Penaos e c'hellfe lezennourien en em zibab gant ur seurt dislavar ? Hag an deputeed n'o deus ket roet o soñj c'hoazh !

Tangi Louarn

Diwan

Adsav lezennel 6 MIZ OUZHPENN

Barnet e oa bet Diwan, d'ar 4 a viz Here 1993, d'ur prantad "adsav lezennel" dindan evezh ur merour d'ar gevredigezh na c'helle ket stanket an darempredoù etre ar skolioù brezhonek ha Ministrerezh an Deskadurezh betek-henn, n'en deus ket gallet Diwan kinnig ur raktres sklaer a "adsav" e-pad ar prantad-se. Talvezout a ra ur raktres sklaer a adsav, evit al lez-varn, bezañ gouest da ginnig budjedoù kempouez evit an tri pe ar pevar bloaz zo o tont hag ivez kinnig un doare da baeañ an dleoù (7 milion a lurioù).

BUDJEDOU KEMPOUEZ

Evit ma c'hellfe Diwan kinnig budjedoù kempouez, anat eo e rank ar Stad c'hall kemer e karg kalz muioc'h a bostoù eget ar pezh a vez graet hiziv an deiz. Hag evit ma padfe ar c'hempouez-se e rank ar Stad ivez d'erc'hel kont eus kresk Diwan, ar pezh n'eo bet graet morse c'hoazh gant hini ebet eus an emglevioù zo bet sinet betek-henn etre ar Stad ha Diwan. Meur a emvod zo bet abaoe penn kentañ ar bloavezh war ar c'hrafoù-se, lod er Ministrerezh e Pariz ha lod all e Rektordi Roazhon. Betek ar 6 a viz Ebrel e seblante an traoù mont difonn, met war an tu mat memestra. D'an deiz-se avat e oa bet dipitet tud Diwan pa oant deuet er-maez eus o emvod gant ar Rektor ha gant pevar enseller akademiezh eus ar rannvro "Bretagne" (Breizh hep al Liger-Atlantel), dre ma oa sac'het pep tra : nac'het e veze digeriñ postoù nevez, nac'het al lise hag an eil skolañ, skoazell ebet evit ar stummadur ha kaoz ebet eus ar c'hresk e niver ar c'hlasoù en dazont.

D'an 20 a viz Ebrel avat, e-keit ma oa implijidi Diwan o vanifestiñ dirak

Echu eo prantad kentañ an "adsav lezennel". C'hwec'h miz ouzhpenn zo bet roet d'ar gevredigezh gant lez-varn Kemper. Daoust ha trawalc'h e vo evit kavout un diskoulm da badout avat.

RESTEUREL ARCHANT AN DLEOU

O asant o deus roet an departamantoù hag ar rannvro evit sammañ war o choug ul lodenn eus an dleoù gant ma vefe sklaer statud Diwan, gant ma vo kempouez budjedoù ar bloavezhioù da zont, ha gant ma asantfe Diwan da baeañ ul lodenn eus an dleoù (25%). Evit ar pezh a sell ouzh ar statud, emañ Diwan war-nes asantiñ da statud al lezenn Debré, gant ma vo roet ar postoù nevez bet goulennet ganti. Da neuze e vefe roet kevratoù d'an dud ha d'ar skolioù dindan 4 bloaz.



Implijidi Diwan dirak ar rektordi e Roazhon d'ar Merc'her 20 a viz Ebrel 94

Daoust m'o deus nac'het ken groñs hag ar wech kentañ kemer postoù skolañ Plijidi e karg (urzhoù sklaer a dije bet pennadurezhioù an deskadurezh e Breizh nevez zo), n'eo ket ken serret an nor evit kaozeal diwar-benn al lise (adstudiet e vo).

Un emvod all zo bet lakaet e miz Mae evit studiañ kudenenn ar stummañ skolaerien ha kelennerien hag evit adstudiañ niver ar postoù. N'eo ket tizhet ar pa eta, na pell alese, met ar c'hammedoù kentañ zo bet graet memestra. Salv ma teuo ar re all da heul.

Buan e ranko Diwan en em vodañ gant izili ar C'huzulioù Meur ha re ar C'huzulioù Rannvro evit termeniñ da vat ganto an doare ma vo rannet an dleoù etre an holl. Buan e lavaran, rak m'he deus al lez-varn roet 6 miz ouzhpenn evit kavout un diskoulm, e fell d'ar varmerien adstudiañ an teuliad e miz Gouere. Ne chom nemet 2 viz klok eta evit diskoulmañ an holl gudennoù. Ur wir redadeg e vo met ken mennen ha biskoazh eo tud Diwan ■

Daniel Kernallegenn

# Digoret e vo lise Diwan e miz Gwengolo a zeu !

Emsavusoc'h a-galz emañ stad-antraoù a-fed digeriñ lise Diwan bremañ eget m'edo 6 bloaz zo da geñver digoradur bresk kentañ skolaj Diwan, en ur rannid dister a Vrest. Gant kement-mañ avat e c'hellomp ivez priziañ araokadennoù bamus ha di'hortoz-kaer Eil Derez Diwan, digredus 10 vloaz zo.

- Akuit mat eo ar gelennerien gant ar c'helenn e brezhoneg.

- Bez e c'hello lodenn an dornlevrioù bezañ kinniget da liseidi an Eilvet klas e-kerz o c'hentañ bloavezh lise, a-drugarez da labour aketus Bodadoù an Eil Derez. Gouez dezho !

- Spisaet ha klokaet e vo bet ar geriaouegoù a-razozh gant Kreizenn ar Geriaouiñ.

- Tennañ gouid a raio al lise eus e zigoradur war an hevelep tachenn ha skolaj Roparz Hemon...

- Meizout a ra ar pennadurezhioù melestradurel e karg (Rannvro, Akademiezh...) poellid kendal-CHidigezh ar studioù e brezhoneg gant Diwan.

- En hevelep doare ma vez kinniget budjedoù kompouez, pe e reveur zoken, gant ar skolaj, n'emañ ket al lise tonket da zont da vezañ ur samm ouzhpenn war gont Diwan.

- Start ha resis eo ar c'hoant da gaout ul lise eus perzh ar skolidi : n'eo ket amjestr tamm ebet ar youl o deus da sammañ o lod dezho war o choueg evit savidigezh al lise : dre an intruduse e sav lorc'h enno, evel ma vez graet ivez pa gemeront perzh e buhez ar skolaj.

*Petra 'ta 'vije ur skol-vamm Diwan hep ma vije an tu da genderc'hel gant e studioù en ur skol kentañ*

*derez ? Ha neuze 'ta : petra 'vije ar skolajoù hep ul lise da vont d'o heul ?*

Da bep mamm ha tad eo neuze da sevel emskiant enni pe ennañ war dazont he bugale (e vugale) war greñn pe hir dermen. Kadarnaat en deus graet ar skolaj R. H. ar c'hentañ-derez-holl (95% eus ar skolidi a vez enskrivet er skolaj). En hevelep doare e harpo neuze al lise ar skolajoù, hag e vo dioutañ un aozadur kas-en-dro digor war ar bed, dreist-pouezus evit un enebañ mat eus Diwan, elfenn a genstag hag a genziñs diabarzh, ha diavaez evel-just.

Ret eo soñjal ivez el lañs a vezo roet gant al lise da emlusk an emsav breizhek : embann na ra dija an danvez liseidi ur gazetenn neuz ar startijenn warni ha liesdoare : "Hemon Magazine".

Hogen, skoazell an holl a vo ranket kaout a-benn lakaat war o sav ha da vat raktresoù nevez an Eil Derez ■

**Kartennoù "ezel ar c'huzul skoazell" zo bet embannet Skrivañ da : Kuzul Skoazell Lise Diwan Skolaj Diwan straed Gay-Lussac 29480 AR RELEG**

## SKOLAJ PLIJIDI

E Plijidi, e Bro Dreger, an hini e vo lec'hiet eil skolaj Diwan a zigoro e zorioù e miz Gwengolo 1994. War-dro 15 bugal a vo er 6vet klas kentañ a zegemero skolidi o tont eus skolioù kentañ derez Gwengamp, Lannuon, Pempoull, Sant Brieg ha Karaez. Er bloavezhioù war-lerc'h e vo digoret klasoù all, dre ma kresko oad ar vugale ■

## Kermes

**Kermes Skol Diwan an Naoned** a vo dalc'het d'an 12 a viz Mae, devezh Yaou-Bask e Park La Gournerie e Saint-Herblain adalek 2 eur an abardaez.

Ar strollad "Strobinell" ha sonerien eus bro Naoned a vo aze evit dudi ar re vihan hag ar re vras.

*C'hoarioù a bep seurt, standoù, ha peadra da zebrñi ha da evañ, ul lotiri gant prizioù dedennus, setu ar pezh a ginnigimp deoc'h. Diouzh an noz, e c'hello ar re o devo c'hoant, chom da goañañ. Dewit niverus. Kasit tud ganeoc'h. Plijadur a vo ! ■*

## Diwan Sant-Brieg

**Dorioù digor ar skol** a vo d'ar Sadorn veure 28 a viz Mae. Gweladenniñ ar skol, komz gant ar skolaerien ha tud ar vugale a vo tu d'ober, met arvestiñ ouzh un abadenn dafsuou Breizh kaset gant ar vugale ivez avat. Goude an dorioù, e vo ur banne digorkalon ■

Y.-V. T.

## ELZAS

**Kas ar c'hlasoù divyezhek** galleg-alamaneg war-raok eo a fell da Guzul Rannvro Elzas. Emañ Kuzulierien ar Rannvro-se o paouez votiñ 16,7 milion a lurioù evit diorren ar c'hlasoù divyezhek-se, e budjed 1994. Abaoe un nebeut bloavezhioù hepken ez eus klasoù divyezhek du-hont, krouet gant ur gevredigezh e 1991, hag "anavezet gant ar Stad" e dibenn 1992. Er bloaz-mañ ez eus 38 klas alamaneg-galleg, klasoù mamm ar braz anezho. Fellout a ra d'ar C'huzul Rannvro, ha da Rektor an Akademiezh, krouiñ 420 klas er skolioù kentañ derez er pemp bloaz zo o tont. Kement-mañ a dalvez e vo ezhomm stummañ 210 skolaer. Adalek 1997 e vo klasoù divyezhek er skolioù eil derez ivez. Ha fellout a ra d'ar ra war-dro ar skollata hag ar stummañ e Rannvro Elzas lakaat ar skolioù micher d'ober gant an doare kelenn-se ivez ■

I. K.

## Ar brezhoneg er gelennadurezh

**Da geñver ar sizhunvezh kelaouiñ bet savet diwar-benn ar brezhoneg hag a zo bet dalc'het e Skol-Veur v-Brest eus an 11 betek ar 17 a viz Ebrel, ez eus bet kinniget gant Unvaniezh Studierien Breizh-Izel - Dazont diskouezadegoù, ur brezegenn-diviz...**

Staliet e oa dikouezadeg nevez an APEEB e-kichen hini Diwan. Levrioù brezhonek evit ar vugale hag ar grennarded a oa diskouezet gant An Here e-keit ha ma oa diskouezet levrioù-studi brezhoneg, geriadurioù h.a. gant ar C.R.B.C.. Tro o deus bet ar studierien da welet ivez film Diwan hag an hini bet savet gant U.G.B. "Vous avez dit breton" ?

D'ar yaou 14 e oa digor Skolaj Diwan Roparz Hemon d'ar studierien. Ne oant ket deuet stank avat ! (un 10 den bennak). Bet ez eus bet tro da gaozeal gant kelennerien 'zo diwar-benn buhez ar skolaj, al levrioù-skol brezhonek bet savet evit an eil derez, ar sevel gerioù nevez, ar c'helenn e lies yezh er skolaj, er stad-C'hall dre vras hag e Europa an Hanternoz. D'ar Meurzh 12 da 20e 30 e oa bet ur brezegenn-diviz diwar-benn ar gelennadurezh vrezhonek. Bez' e oa o prezeg Fañch Morvannou (UBO), Rene Le Coq (DDEC), an aotrou Riou (APEEB) hag Andre Lavanant (Diwan), deuet gant ur jubennourez evit gellat kaozeal e brezhoneg hepken.

Deuet e oa ur c'hant a dud, nebeut-kenañ a studierien en o zouez siwazh ! Setu n'eo ket bet tizhet pal kentañ ar brezegenn : kelaouiñ ar studierien. N'o do ket desket an Emsaverien deuet d'an diviz-mañ kalz a dra e-pad an abadenn. Diskouez a ra kement-mañ, ar memestra adarre : diseblant eo erru darn vrasañ ar studierien, na sellont ket ken tro-dro dezho ouzh ar c'heleier peotramant ouzh an abadennoù a vez kinniget dezho. Dav e vo deomp poaniñ muioc'h c'hoazh neuze evit dedennañ anezho, ken a vo dibikouezet o daoulagad ! ■

U.S.B.I. / Dazont BREST

## GALV D'AR C'HENTAÑ MINISTR GALL



Emañ ar C'HUZUL ETREVROADEL EVIT KENDALC'H AR BREZHONEG o paouez skrivañ d'an Aotrou Balladur da sachañ e vevzh war stad ar brezhoneg e Breizh, gwallgaset ma'z eo gant politikerezh ar gouarnamantoù gall. Hervez ar C'huzul Etrevroadel evit Kendalc'h ar Brezhoneg, en deus e sez kreiz e Brusel ha skourroù e tremen 15 Stad er bed a-bezh, ez eus fedoù nevez a ziskouez emañ stad ar brezhoneg o vont war washaat : en o zouez al lezenn nevez diwar-benn implij ar galleg ("Lezenn Toubon"), enkadenn Diwan, nac'hadenn ar Stad C'hall da sinañ Karta Europa ar Yezhoù.

Diskleriañ a ra pennsekretourez ar C'huzul Etrevroadel evit Kendalc'h ar Brezhoneg, ar Velgiadez Monique Blaise, e ranko ar C'huzul kas keloù da holl izili Parlamant Europa, ma talc'h ar gouarnamant gall d'ober skouarn vouzar ouzh goulennoù reizh ar Vretoned. Eilskridoù eus al lizher-se zo bet kaset da Vinstred all, en o zouez F. Bayrou, Ministr ar Skolioù, J. Toubon, Ministr ar Sevenadur, P. Mehaigner, Breizhad ha Ministr ar Justis, da Yvon Bourges ivez, hag all ■

I.K.

## Kemennadenn

**Manifestadeg evit ma vo talvoudekaet ar c'helenn brezhonek en arnodennoù ha kenstrivadegoù**

U.G.B. (Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg), APEEB-KTKB (Kevredigezh an Tiegezhioù evit Kelennadurezh ar Brezhoneg), Dazont-USB (Unvaniezh ar Studierien Brezhoneg) a c'halv an dud da zont da vanifestiñ dirak IUUFM-Madur, 153, Straed Sant Malo, e Roazhon.

**d'ar merc'her 18 a viz Mae**


**Gouenn a reont :**

- ma vo lakaet ar brezhoneg war-renk gant ar yezhoù all (ar c'horseg en o zouez) e koñkourioù diabarzh ha diavaez an IUUFM,

- ma vo roet tu d'ar skolidi da dremen danvezioù eus an arnodennoù, breved hag ar vache-louriezh e brezhoneg,

- ma vo krouet ur c'hCAPES brezhonek penn da benn,

- ma vo krouet un DEUG brezhonek e Skol-Veur Brest. Ar c'horseg 'zo aet war-raok war an tachennoù-mañ (CAPES, stummadur) arabat d'ar brezhoneg chom sachet.



## Bod d'an Euskariz ?

Tud lezet da vont : Marie-Hélène LEROUX ha Karim CHAKROUN a oa bet lezet da zont er-maez eus toull-bac'h FLEURY-MEROGIS (Bro-C'hall), an hini gentañ d'an 8 a viz Ebrel, egile d'an 20 a viz Ebrel.

**Tud goulenataet :** daou zen a ROAZHON a oa bet goulenataet gant P.J. PARIZ. E Nimes (Okitania) e oa bet tapet Eugène BECOC, implijad KER-ROAZHON d'an 20 a viz Ebrel. D'an 21 e voe tro ur vaouez a 65 vloaz : lezet e oa bet da vont da 11 eur noz pa oa hi bet tapet da 6 eur beure ■

## SIVOM ar Baol AFERIOU LOUS ER VRO WENN

**Abaoe an hañv o deus lakaet o fri prefeti Naoned hag ar bolis e kontoù SIVOM ar Baol. Traoù iskis a zo bet kavet e-barzh : dleoù divent, arc'hant o vankout, toulloù don er budjed... Setu peadra da zihuniñ ar Vro Wenn a gouske dindan galloud Olivier Guichard.**

An afer he deus kroget e miz Gouere p'eo bet lakaet Roger Potot er-maez eus e bost e SIVOM ar Baol (*sindikad mervrezh ar c'humunioù evit an dour da evañ, an dour lous, al loustoni, ha.e*). 15 kumun zo er SIVOM-mañ, eus Pornizhan da Erbigneq, un tamm brasoc'h eget er Vro Wenn. Un enklask a zo bet goulennet gant O. Guichard diwar meraan ar SIVOM e-pad ar 5 bloaz diwezhañ. Roger Potot a zo harzet e miz Here hag un embreger e miz Du ivez.

Disoc'hoù an enklask a zo roet e miz kerzu : 17 milion a lurioù gall laeret, lakaet war savadurioù ha n'int ket bet graet, 23 milion a doull evit ar bloaz 1993, ha 303 milion a zle (hag hiriv un enklask en deus kavet dleoù all a sav en holl da 441 milion). Tout-se a vo da baeañ evit seizh kumun dreist-holl, ar Baol hag ar re zo e-kichen.

### Meraan an aferioù hag ar SIVOM

Disrannour bras Breizh an amzer a-vremañ, O. Guichard a zo ur chef war e zouarou : maer ha kannad RPR ar Baol, prezidant ar rannvro, pep tra a vez graet gantañ pe gant e skipailh. E-vele-se o Roger Potot ur mignon a 20 vloaz dezhañ, un den a fiziñs a oa e sekretour pa oa ministr O. Guichard. Keit ha ma n'oa ket echu enklask ar ranke chom sekret. Met ar maeriu PS ha PCF n'int ket chomet didrouz : re a



arc'hant a vo da baeañ, re a draoù n'int ket sklaer. Da skouer, ne c'helle ket pep maer votiñ ar budjed ma ne oa ket pep tra eus e gumun meret gant ar SIVOM, ar budjedoù a oa votet re ziwec'h hep ma vefe lâret un dra bennak gant ar prefeti, ha re a c'halloud a oa e daouarn Roger Potot. Met O. Guichard en em zifenn gant ur pennad-kaoz er gelaouenn "L'Echo de la Presqu'île" : "ar gelaouenn lec'hel a vez a-du gantañ bewech."

### Da vare ar votadegoù

Deuet da vezañ un afer bolitikel, skeud dleoù ar SIVOM a zo bet e pep lec'h e votadegoù kantoniou ar Groazig ha Gwennann. E kanton ar Groazig, maer Bazh eus ar strollad PCF, René Berche en deus kollet war-bouez nebeut a-enep an RPR en eil tro : 49,0 % eus ar mouezhioù. E kanton Gwennann, e lec'h m'en doa maer RPR Gwennann Michel Rabreau, mignon Guichard, 60 % eus ar mouezhioù en dro gentañ e 1986, ar maout a zo aet gant maer an Turbal, eus ar strollad PS gant 53 % eus ar mouezhioù en eil tro.

Ar Sadorn a-raok eil tro ar votadegoù ar maeriu en em gavet er SIVOM o deus votet gant 23 mouezh a-enep 16 da lakaat war gresk a 75 % ar pezh a vez paet gant ar c'humunioù evit ar SIVOM. Ar c'helou-mañ a zo bet skrivet er c'hazetennoù d'al Lun, un deiz

war-lerc'h eil tro ar votadegoù. A-dra sur, ma vefe bet anavezet ar c'helou-mañ gant ar voterien, e vefe muioch c'hoazh anezho o votiñ disheñvel.

Rak sur eo, pa gresk a 75 % lod ar c'humunioù evit ar SIVOM, tud ar c'humunioù-mañ eo a baeo. Hag an dra-se zo bet komprenet abaoe pell : 70.000 a dud a chom e 15 kumun ar SIVOM. Un unvaniezh a dud a fell dezho reiñ o ali war an doare-meraan a zo bet krouet e miz Kerzu. 700 ezel a zo ganti bremañ. Met siwazh, an dra-se a ziskouez ne zihun an dud nemet pa vez kudennoù gant o arc'hant. Met piv a laro tra pa ne vez graet "nemet" distruj an endro, gwaskañ sevenadur Breizh pe diorren nemet an douristelezh ? Al lodenn vrasañ a chom sioul.

Erfin, Charles Pasqua, ur paotr all eus an RPR en deus prometet skoazellañ ar SIVOM evit ma vefe nebeutoc'h a zleoù gantañ. Pegement a vo roet ? 100 milion ? 200 milion ? Evit Bretoned an Emsav e tiskouez un dra ; e Bro-C'hall e vez pep den keit-ha-keit, gant memes gwiriou met gant ar re hag o deus mignoned er gouarnamantoù e vez gwiriou all. Ha siwazh ne seblant ket bezañ mignoned eno evit ar re a zifenn Skolioù Diwan pe sevenadur Breizh ■

Benead Lukian

## "Yes, I do" pe "Reuzioù Jakez Holvat"



### Buan, ho kleenex !

En he niverenn eus an 12 a viz C'hwevrer ez embanne ar gelaouenn "Le Monde" ur pennad diwar-benn Kendalc'h ar F.E.N. (Fédération de l'Education Nationale, evel ma oar an holl) e Tours. Setu ar pezh a c'heller lenn "Er mouezhiadegoù micherel diwezhañ hon eus kollet 110 diskarg-labour sindikadel. Da lavarout eo e ranko 110 denekarg eus hor sindikad mont endro da labourat en o sal-klas", a lavare, ez-eeun-tre, met a vouezh izel, unan eus ar renerien. "Maomp o vont da letvañ gant ur c'helou ken trist ! Aet eo, anat eo, ar postoù-diskarg gant ur sindikad all, an F.S.U. marteze. Pet skolar pe glenner a zo e-vele-se "diskarget" eus o labour-skol o virout o gopr evel just hag o sevel prim e skeul ar goprou- evit chom hep kelenn ha reiñ o amzer d'ur sindikad, d'un oberenn laik, d'ur c'hlub bennak, piv oar da betra c'hoazh ? War a lavare e vefe 7000 (seizh mil) skolar diskarget e-vele-se eus o labour skoliata- o'ch ober a bep seurt, nemet ober skol. A ! perak ne vez ket digoret klasoù divyezhek ? Perak ne vez ket aotreet skolioù Diwan nevez ? C'hwï oar... n'eus ket a bostou ! ■

P. D.

### Arc'hant ar Sevenadur

Ministrezh ar Sevenadur hag ar "Francophonie" a c'hallfe harpañ Gouel Broadel ar Brezhoneg er bloaz-mañ. Harpañ a ra dija ur gouel lazou-kanañ e Roazhon anvet "Singing in the Rennes".

G. ar C'helleg



### Muzulioù gwevnoc'h a-berzh an SNCF

Evit ad-c'houit an arvalien bet kollet ar bloavezhioù diwezhañ en deus embannet Jacques Berducou, rener al linennou hir, muzulioù nevez a ziskenn ar prizioù adalek miz Mae.

Ar pouezusañ a vo diskar strishadurioù he deiziadur triliv evit pep T.T.B. Abaoe 1979, e c'helle arvalien an SNCF beajiñ gant un distaol mard aent gant trenioù darempredet nebeut. Gant an trenioù ruz ne oa distaol ebet da gaout ruz ne ar re wenn e veze unan dister. Adalek an 29 eus ar miz e steuzio ar renkader-se hag e c'hello ar veajourien lakaat o distaolloù (yaouankiz, kozhni, strolladoù...) da dalvezout e kement tren tizh buan a vo, nemet er live 3 ha 4.

Evit an trenioù all war al linennou hir e vo diskaret an deiziadur triliv e daou bred-amzer. D'an 29 a viz Mae e troia an devezhioù ruz da wenn, gant un distaol a 20% neuze 'ta. D'ar 25 a Wengolo e peursteuzio an deiziadur-se evit 97% eus an trenioù war al linennou hir.

Eil muzul : adalek an 29 a viz Mae c'hoazh e jedor an distaol diwar priz klok ar bilhed a live 1 (trenioù gant nebeut a zarempred), priz ar RESA hag an adskodenn-evit-an-tizh e-barzh. N'eus ket anv a denañ ar RESA hag an adskodenn-se diwar priz bilhed an T.T.B. evit an dud a veajo etre Brest ha Roazhon avat, daoust ma n'ez a ket d'an tizh T.T.B. war ar pennad-se ■

Y.-V. Thorel

# Emañ arme Turkia o vont diroll "DISKOULM DIWEZHEL" E KURDISTAN

Diwar atiz kumuniezh Kurded Breizh, c'hoant ganto kas dileuridi etrevroadel da Gurdistan da geñver lidoù berzet an Newroz (Kalanna) d'an 21 a Veurzh, ha dilennadegoù kêr ar 27 a Veurzh, ha da heul mennad Parlament Europa an 10 a Veurzh o kondaoniñ harzidigezh kannaded kurdan an DEP (Strollad an Demokratelezh), e oa aet pevar Roazhonad, daou anezho izili eus DAZONT-USB, betek Diyarbakir, kêrbenn Gwalarn-Kurdistan a-gevret gant Europiz all. Kejet o doa ouzh tud eus Kevredigezh Gwiriou Mab-Den (IHD), kelaouennerion eus Özgür Gündem, dastumet testenioù dre gomz ha luc'hskeudennoù, daoust da gabestroù, gwaskoù ha gourdrouzoù servijoù diseurt arme Turkia. Un dachenn "er-maez eus ar gwir" eo Kurdistan: taolioù an arme, harzadennoù keodediz turkiat o'ch ambroug an dileuridi, kêriadennoù losket, pobladoù forbannet, keulfe, mestaolioù, eneberezh oberiant ha gouzañv. Setu danevell ar veajj...



Skolaj distrujet gant an arme e kêr Tatvan evit mirout ouzh ar vugale da vezañ skolliaet

Hor c'hentañ emgav a voe e skridoazerezh Diyarbakir ar pemdezieg Özgür Gündem. Tost kuzh eo ar gelaouenn gurdan-se: 14 kelaouenner zo bet lazhet, Musa Anter (80 vloaz) en o zouez, ar werzherion yaouank a vez lazhet a daolioù kontilli, ne vez ket gwerzhet ar gelaouenn e Kurdistan (an arme hag ar polis an hini a werzh ar c'helaouennnoù), miliardoù a lurioù tell-kastiz a vez reketet dirak lez surentez ar stad. Ur renabl eus an devezhoù diwezhañ a voe kontet deomp gant ar pennskridaozer: Abaoe penn kentañ an emgannoù (1984) ez eus bet distrujet etre 870 ha 900 kêriadenn, teir o paouez bezañ distrujet d'an 10 ha d'an 18 a Veurzh. Roet e oa bet tri

devezh da boblañs Ortac da zigêriadegiñ. E Diyarbakir ez eus bet skrapet 500 a dud abaoe an 13 a Veurzh (1000 e Gwalarn-Kurdistan). E Mardin e voe c'hwèzhet un tantad bras evit an Newroz: 10 den harzet. O c'hortoz o frosez emañ ar 5 kannad eus an DEP, renet gant Leyla Zana hag Ahmet Türk, koulz ha kannad dizalc'h Sirnak. Tamallet e vez outo bezañ izili eus ar PKK. Ret e vo d'an damallidi prouiñ ez int digablus. Mennet int da zifenn o gwiriou. Un 250 000 disenter bennak ouzh ar servij soudard a vefe, ouzhpenn ar 1000 dezertour abaoe penn kentañ 1993. E

Mardin, da skouer, o doa dezertet 77 soudard en un taol, evit chom hep en em gannañ ouzh ar PKK. Lod zoken zo aet d'ar PKK. Evel an holl Kurded hor boa komzet outo o doa ar gelaouennerion goulnennet ouzhimp selaou, sellout ha kelaouiñ Europa.

### Newroz berzet

**D'al lun 21 a Veurzh 1994** (Newroz) hor boa gweladennet Uniad Implijidi ar Yec'hed. Ouzh ar voger skeudennoù tri eus ar c'hwec'h ezel bet lazhaedet gant an enep-guerilla, ur rener klañvdi en o zouez. C'hwec'h ezel all zo bet forbannet da Greiz Anatolia, seizh all en toull-bac'h.

Bet e oamp e Bismil o'ch arvestiñ an Newroz. Sac'het en ur c'hazarn e oamp bet kunujennet "Impalerourion", "gouezidi" gant ar c'hapiten turkiat, hag eñ mennegiñ Lawrence Arabia, Bosnia h.a. Kaozioù hag a vez ingal gant soudarded Turkia.

Spontus eo stad yec'hed ar gêriad: dourioù uzet war wel etre an tier, banne dour red ebet, 80 000 a dud hiziv an deiz e-skoaz 25 000 tri bloaz zo (da heul dilec'hiadegoù poblañs).

Evit tantad an Newroz e oa lakaet tan en un nebeut bandennoù-rod. Peogwir e oamp eno o doa ar vugale kemeret tro da lidañ ar gouel.

Aon en doa ur paotr kozh rak bezañ harzet abalamour m'en doa komzet ganemp, met gwell e oa gantañ reiñ da anaout stad an traoù da Europa. "E peoc'h hag e mignoniezh e fell deomp bevañ gant an Denelezh, evel ur Vroad. Dieub e vennomp bezañ, er gêr koulz hag er-maez, noz ha deiz." Ur wezh ma oamp aet kuit e oa bet harzet 80 a dud, 12 bugel en o zouez. E Mardin e lavare an dud: "Dre m'hon eus komzet gant an dileuridi emaoamp o c'hedal an arme da zont d'hor skrapañ an noz-mañ, met gwell eo ganemp kelaouiñ Europa." E-pad an noz e tec'has kuit ar re o doa komzet ouzh an dileuridi.

A-hed an deiz e oa bet tantadoù e Diyarbakir. Gant Kevredigezh Gwiriou Mab-Den e oa lakaet niver an dud war ar stradoù d'ur 500 000 bennak, (nebeut e-skoaz an 3 000 000 a annezidi). Lazhet e voe 4 den, harzet 500.

Distrujet e oa bet ur gêriadenn (Arti) d'an 19 a Veurzh, harzet 2 zen, an annezidi all o klask bod da lec'h all.

### Propaganda an arme

**D'ar meurzh 22** a Veurzh e oamp bet e Kulp, e-tal Lice. Ouzh ar stankadennoù-hent o doa ar soudarded displeget deomp o "sell ouzh an traoù": "Spontion ar PKK, evel re an IRA, zo lazherion ha tud fallakr, o tont eus Siria, Irak hag Iran. Armenianed int, 80% anezho. En

Alamagn n'eo ket banniel ar PKK a vez displeget, hogen hini "Armenia Veur". Forzh penaos eo Armenian Abdullah Ocalan. Gant ar "guerilleros" e vez kavet teulioù armenian. Lakaat minennoù a ra ar PKK, ha lazhañ tiegezhioù ar warezerion, skrapañ bugale 12 vloaz, o gwallañ, klask mirout ouzh ar Gurded bezañ gwarezerion. Etre 2000 ha 3000 guerillero "armenian" zo en takad digontrôll, rak siwazh e vez an arme o labourat o tuyañ d'al lezenn(l). Ur broviñs turkiat eo Kurdistan, n'eus kudenn kenel e sevenadurel ebet. Ne ra ar PKK nemet o naoz d'an islamourion. Gwir eo ne zistruj ket ar PKK kêriadennoù, hogen lazhañ ha distrujañ tier ar re a labour evit ar stad. N'eus bet distrujet kêriadenn ebet diwar an 800 a vez kontet(!) Mat eo pep tra e Turkia. Ar gannaded toullbac'het (DEP) zo sponterion, bet o reiñ bod da sponterion all hag o kuzhat bombezennoù. Pa vez darvoudoù diwar gwall an arme e vezont trist, rak ma labouront diwar aozoù start. 70% eus ar "guerillos" zo daoust dezho er PKK. E skoaz gwarezerion ar c'hêriadennoù ne labouront ket evit arc'hant, evit gwareziñ o c'hêriadenn ne lavaromp ket, ne vezont ket rediet gant an arme."

2 garr-hobregonet, 8 sammorell, 1 c'hanol ha 12 jeep a oa ouzh hon ambroug. En ur vont e Kulp e weljomp tier ha staliou devet ha mindrailherezet. Degemeret e oamp bet er c'homiseridi: tregont "special team", armet gant M16-ou hag armoù a-feson all, en o gwiskamant da guzhat, bandennadoù boledoù a-dreuz skoaz, chas ganto, soudarded ha gwarezerion armet gant kalasnikovoù a oa o rodeal e kêr. Meur a rann diseurt a zo oberiant e Kurdistan: Archererezh (Jandarma), Kom-mandoed Arche-erezh, Komman-dod ar Menez, Polis, Polis Arbennik (Special team, pe "Ramboed"), Bleizi Louet, torfedourion en o zouez). Unanennoù enep-Spontezerzh, Gwarezerion kêriadennoù, kement ha 280 000 armet (evit 14 milion a Gurded), ouzhpenn 50% eus nerzhioù ar stad eta. Abaoe 1984 en deus ar

brezel koustet 25 miliard a \$US, div wezh sammad kriz kenwerzhiad diavaez ur bloavezh.

### Lice : distrujet 80% anezhi, forbannet 5/6 eus he boblañs

**D'ar merc'her 23** a Veurzh hor boa klevet (digant testoù) e oa bet lazhet un den, e wreg hag e zaou vabig e Zengy. Bourreviet e oa bet eñ hag ur mignon, en a-raok. Skrapet e oa bet un den, lazhet daou all. Distrujet e oa bet Sisi, Misrif hag Hethel.

Teir c'hêriadenn a oa bet losket ha mindrailherezet war hent Lice.

E Lice e oa bet lavaret deomp, gant kozh ha yaouank, e oa bet distrujet pep tra gant an arme. Ne chom nemet 1/6 eus ar boblañs a 10 000 a dud er gêr a oa bet distrujet e mez Here. Tri miz zo e oa bet lazhet tud, devet reoù all ent-vev, ha forbannet ar peurrest. Ne vane nemet ar gargidi-stad, hag o doa kaset ar familh da z-Diyarbakir. Er savadurioù foran keodedel, an ti-kêr dreist-holl, en tiez hag er staliou e oa pullic'het pep tra, toulllet a dennadegoù fuzuilh-midrailher. E stradoù zo e oa distrujet an holl dier. Mogerioù an ti-kêr, ha re ar skolaj, a oa toulllet gant roketennoù pe obuzioù bazouka. En tier e oa strewet mouc'houerioù, arreburi, rikou keginañ pullic'het... Ne oa nemet ar c'hazarn hag un nebeut tier ha staliou a oa dizistruj. 350 stal, 400 ti, an holl servijoù keodedel a oa distrujet. Bet e oa bet daou devezh tennañ ha 4 devezh keulfe war-lerc'h. Hervez ar boblañs, ne oa den eus ar PKK war al lec'h, ne oa ket bet a emgannoù. Erruet e oa ar soudarded da heul marv ur jeneral eus ar Jandarma en ur lavarout "devet e vo un ti". Tennet e voe ganto a-hed ar gwenvezh, ha c'hwèzhet an tan e kêr, moskeenn hag all, d'ar sadorn. Pevar devezh diwezhatoc'h o doa gallet tec'hout an dud. E-touez ar re varv ne oa na guerillero, na soudard, tud eus kêr hepken.

Dileuridi zo o doa gallet gweladenniñ ur gêriadenn a oa o paouez bezañ distrujet (2 zen a oa bet lazhet, hervez a glevjomp

antronoz). Met deuet e oa a-benn ar bodad da luc'hskeudenniñ biñsaskellou o vombezenniñ ur gêriadenn all (Derxest). Dalc'het div eurvezh en ur c'hazarn leun a girri hobregonet reteralman hag a ganoliou, e oa bet furchet lod, ha darbet d'un ambrouger kurdad bezañ harzet. Displeget e voe deomp da c'houde gant ur c'henskriver stlenn turkiat "ne oa ket gant ar PKK e oa bet lazhet ar jeneral Jandarma a oa e varv abeg da zistruj Lice, re a lorc'h ma vije bet er re-se o kemenn e varv. Perzh a gemere ar jeneral en ur rann eus an arme enebet ouzh NATO, ha deuet e oa da vezañ disfiz warnañ. Moarvat eo gant ar Servijou Kuzh an hini e oa bet lazhet, ha lakaet ar bec'h war ar PKK."

**D'ar yaou 24 a Veurzh** e oa bet kelou a-berzh dileuridi all e oa bet tennet ouzh tier e Seriki, e-kichen Silvan, gant kirri hobregonet d'an 22 a Veurzh, da 3H beure. Krog e oa ar boblañ da dec'hout, met lazhet e oa bet tri den gant ar soudarded: Haci Fizyi, 60 vloaz, e vab hag un den all. Taolet e voe ar c'horfou er stêr gant an arme, pep a galashnikov hag a bistolenn warno. Da heul e voe degaset kannedh ha kelouennerion gant ur viñsaskell da 7H, ha kinniget an dud-se evel izili eus ar PKK. Dispennet e voe an tu-se eus an istor gant testeniou tud ar gêriadenn. Distrujet e voe kêriadenn Darakali d'an 23 a Veurzh, 2 varv. Dizistruj e oa ar gêriadenn c'hoazh d'an 22. Devet e oa bet a-gevret gant 20 kêriadenn all - tro-dro da Lice-Kulp. Gweladennet e oa bet Hazro gant dileuridi alman. Emañ an archerion o klask sevel ur c'hazarn eno: reketet ez eus 40 den ganto, o labourat dizehan ha dibae.

**3 c'hêriadenn devet**

Gweladennet hor boa Kebaba, hag Isikyalya. Devet e oa bet ar c'hêriadennou ha te'chet an dud tri miz 'oa. Kentoc'h eget dont da vezañ gwarezerion o doa kavet gwel ar gouerion mont kuit da z-Diyarbakir, Istanbul hag Ankara. Ret e oa bet dezho gwerzhañ o chatal. Distrujet 100 ti. En Erdali ez eo devet an holl dier (100 anezho) koulz hag ar skol. Hag ur c'houer ha displegaj deomp: "500 a dud a oa er gêriadenn. Bez' hon eus bet da zibab pe dont da vezañ gwarezerion pe mont kuit. Tri miz zo hor boa nac'het bezañ gwarezerion, hag ar gouarnamant ha lavarout: "Emañ holl er PKK". Bourreviet on bet gant an arme, ha distrujet ar gêriadenn. Kaset e vez ar gouerion bep beure eus o lojeiz e Diyarbakir d'o farkeier gant ur c'harr-boutin, hag adkaset

a vez o vont hag o tont er pezhioù-goude-se. Gant an islamourion an hini eo aet ar maout: n'eus nemeto evel dibab all estregret ar g-kemalouriezh, gwasket m'emañ an DEP ha nac'het outo kemer perzh en dilennadegoù. Hervez servijou kuzh Turkia ez eus 10% eus ar boblañs oberiant (tro 4,5 milion eo



d'ar Sul e oamp bet e Tatvan hag hor boa arsellet ouzh an dilennadegoù

en-dro bep noz. 18 kêriadenn zo bet distrujet en trowardroioù. Gwellet 'm eus er skinwel ur vaouez o'n em lazhañ gant an tan en Alamagn. Karout a rajen bezañ en he lec'h. Bugale ac'hann eo ar PKK, n'int ket sponterion. Hor bugale int." Goulenn a reas ouzhp ober ar muiañ a vrud ar gwellañ en Europa: "hor goanag nemetañ eo".

**D'ar gwener 25** hor boa klevet e oa bet div gannadez alaman eus hor strollad dileuridi betek ar gêriadenn bet bombezenet e-tal Lice d'an 23. Pulluc'het eo pep tra. Merzhet o deus e oa bet devet tud.

A-hent-all e oa bet lazhet daou waz gant ar polis e Diyarbakir d'ar 24 da noz.

**D'ar sadorn 25** e oamp bet e Tatvan, ma oamp bet dalc'het el leti, goude ur weladenn verr e kêr. Harzet e oa bet ur guerillero gant ar polis.

**D'ar sul 27** hor boa arsellet ouzh an dilennadegoù: reizh e hañvale pep tra, met an digenvezle-c'h ne vez alies nemet ur pezhig e-tal an trepas m'emañ dalc'het ar votadeg, pe ur c'hornig serret gant ul liñsel: ne vern vij, polis hag all,

ar boblañs oberiant) e Kurdistan o sevel a-du gant ar PKK. Etre 20 000 ha 30 000 guerillero a vefe er PKK. Chomet eo mignoned ar PKK hep kemer perzh er vot, evel ur c'halz all a dud, daoust ma'z eo berzet gant al lezenn.

E Diyarbakir hor boa gwelet heuliadennou un mesteal en ur burev-votii. Klevet e oa bet gant dileuridi zo e oa bet bombezenet ur gêriadenn "dre fazi" ar sul-se: 12 den lazhet, 10 digavadus, un niver direis a re c'hloazet. En ur gêriadenn all, Sapici, e oa bet lazhet ur gwaz hag ur vaouez, 4 den digavadus.

**D'al lun 28** e oa bet taget ur paotrig 12-13 vloaz o werzhañ Özgür Gündem, stlejet war 6 pe 7 metr gant unan dianav en doa klasket e grougañ dirak sellou an holl. Disklaret en deus ar mous ez anavezet an den evel bezañ ezel eus an enep-guerilla.

Gant an dileuridi eo bet klevet tud arme Turkia oc'h ober gant an droienn "diskoulm diwezhel" evit ober anv eus "kudenn" ar Gurded. Ronan al Louarn

**Okitania**

**C.I.D.O. rekouret gant Paris**

Abaoe un toullad mizioù e oa aet berr he gwenneien gant ar C.I.D.O. (Kreizenn etrebroadel an titouriñ okitan) e Besiërs. E 1975 e oa bet krouet evit skignañ danvez okitania ha saveteiñ dastumadegoù levrioù o vont da goll a-gleiz hag a-dehou.

Ret eo d'ar C.I.D.O. dic'hoprañ tud eme Ives Roqueta, rener ar gevredigezh.

Kinniget he deus Levraroeg Vroadel Frañs skoazellañ ar C.I.D.O. avat. Ur wirionez diaes da lonkañ, pa n'eo ket bet gouest politikerien 'zo da unaniñ nerzhioù o rannvro evit ober kenedh-all.

Da welet, n'eus dañjer ebet koulskoude e'ch aje pep tra etreket Paris. En Okitania e tleje menel teñzorioù he lennegezh kozh hag he danvez modern eta.

C.I.D.O. : 7, ru Rouget de Lisle, Besiërs.

**Lituania**

**Paper-moneiz adimplijet**

Ne gare ket nemeur Lituaniz o moneiz da c'hortoz, an "talonas". Fent o doa bet memestra gant ar skeudennou a oa moulet warne : un ourz, ur c'honif pe un evn... Emañ Lituania gant he moneiz da vat al "litas". Petra d'ober gant ar bilhedoù all ?

Prent eo bet an "talonal" nevez 'zo gant ur vilin-baper hag a zo en sell d'adimplij anezhe evit ober paper-privezioù. War bouez un nebeud skwerrennoù miret evit an dastumerien bilhedoù-bank, ne vano mann eus an "talonas". Hag un dalvoudegezh wirion en do en e gefridi nevez...■

**Estonia**

**Kablus ar prizon e-unan**

Saotret-vil eo ar Mor Baltek a-vaez da gêr Tallinn. Eus prizon Patarei e teu ar braz eus al loustoni-se, rak war-eeun e'ch a benmez 800 metrad-kub a dour lous e plegmor Finland.

Koustañ a ray kerik, war-dro 370.000 dollar stagañ kaniou ar prizon ouzh rouedad-saniou doureier lous Kêr Tallinn.

Un dra ret e vo, avat, a-barzh lakaat aodou hanternoz Estonia da doujañ ouzh lezennou etrebroadel an disaotrañ. Ha na pet uzin all a ranko ober hañval ivez...■

Joel Donnart

**Latvia**

**Skolioù-mamm war nebeutaat**

Unan diwar teir skol-vamm zo bet serret dindan an daou vloavezh diwezhañ. 28,3% eus ar vugale etre unan ha c'hwec'h vloaz a vez kaset d'ur skol bennak ar bloaz-mañ (37,7% a oa a-raok). Arru eo re ger ar skoliañ e Latvia ha koulz e kav da galz familhoù miret o bugale yaouank er gêr gant o zudou-kozh. Setu kentel c'hwerv ar statistikou a-berzh-stad ■



**KAZETENNOU BREIZH**

**L'Avenir de la Bretagne**  
(PDBL) 150 L/bloaz  
BP 4103 - 22041 Sant Brieg Cedex 2

**Combat Breton**  
(Emgamm) 150 L/bloaz  
BP 71 - 22202 Gwengamp Cedex

**Le Peuple Breton**  
(UDB) 160 L/bloaz  
BP 301 - 22304 Lannuon Cedex

**Armor Magazine**  
225 L/bloaz  
Pont Sant Jakez  
BP 419 - 22404 Lambal Cedex



**Sina**  
Diskouezadeg  
livadurioù  
a Sina

He Yifu, livour golo al levr "Ar Puñs" bet embannet gant Mouladurioù Hor Yezh, a ziskouezo un darn vras eus e daolennou er stal Crédit Lyonnais, 4 straed ar Moneiz e Roazhon, betek ar 6 a viz Mae 1994. War un dro e c'hellor gwelet livadurioù Zhang Yun Ling, eus ar vinozelezh maxi.■

**Relijion**

**Prederiadennou reizhvriek evit an Iliz katolik**

Prederiadennou bet skrivet gant Bartholome Iañ, Eskob-Meur reizhvriek Kêrgustentin, "a-ratozh evit an Iliz katolik" a vo lennet gant ar Pab Yann-Baol II e-skeud Hent ar Groaz, da noz Gwener ar Groaz, ar 1añ a viz Ebrel. Hent ar Groaz ne vez ket heuliet en hengoun reizhvriek. Un darvoud a-bouez a oa kement-se evit an holl re a labour hag a bed evit unvaniezh an Iliz, hep na vefe diwar-goust ar feiz-mañ-feiz. ■ Y.-V. T.

# Ur skrivagnerez evit ar frankizoù e Bangladech TASLIMA NASRIN ETRE BERZH HA BERZ

Gant skrivañ evit ar frankiz enep da wask ar relijion, evit ar merc'hed ha bihanniver an hindouidi e Bangladech en em gav Taslima Nasrin, rakvarnet d'ar marv, hec'h-unanik ha disouten. Nag ar gouarnamant nag an enebiezh ne gredont he difenn.



goude terriñ he dimez teir gwezh, e ro debron d'ar muiañ niver en he bro. "Enep da bep galv d'al lazhañ omp ha krediñ a reomp er frankiz da gomz," eme A. H. Chowdhury, "met n'hellomp ket difenn he savboentoù. Ur fazi politikel e ve."

### Difenn ar skiant

Pemzek levr he deus embannet ar skrivagnerez betek-henn. Brudet e voe gant he levr gwirvoudel "Bann Nirbachita" (1991) a zeskrive saviad reuzeudik ar merc'hed en ur gevredigezh vac'het gant ar baotred. Ur best-seller e teuas da vezañ e Bangladech hag e stad v-Bengal, e reter India, hag ar priz Ananda a yeas ganti e Calcutta.

He romant Lajja (Mezh, 1992) eo a zo berz warnañ e Bangladech. N'eus sikouerenn ebet ganti zoken. Deskrivañ a ra un tiegezh hindou taget gant Muzulmiz goude darvoudoù Ayodyah, pa oa bet freuzet moskeenn Babri gant hindouidi eus ar re daerañ. "An islamourien a embann e tro an Heol en-dro d'an Douar, pezh zo gaou. Ar skiant a embann e tro an Douar en-dro d'an heol, pezh zo gwir," eme Taslima Nasrin. "Der'hel a rin da zifenn ar wirionez enep ar gaou." ■

Y. V. Thorel

"Taslima Nasrin n'eo ket Salman Rushdie," eme Abul Hassan Chowdhury, ministr an darempredoù gant an estren. A-du eo hi "skrivet en deus Salman Rushdie enep ar profed Mohamed, pa 'm eus me difennet stourm ar merc'hed." Ar vuzulmiz avat o deus lakaet klask warni evit 50 000 taka (a-boan 10 000 lur) evit bezañ disprizet an Islam, brudet ar garantez dieub ha klemmet enep machomerezh ar merc'hed en he romantoù hag he fennadoù-kazetennerzh.

"N'eus ken nemet ar vegenn eus kefredourien Dhaka hec'h anavez," eme A. H. Chowdhury. Un toullad Muzulmiz eus ar re daerañ hec'h anavez ivez. E gwengolo 93 e voe embannet ar Fatoua en hec'h eneb gant Kuzul Kompagnuned ar Profed, e Sylhet e biz ar stad. An Islam zo relijion a-berzh-stad abaoe 88, met ne voe ket degemeret an Charia. Ar Begum, a zo Ministrez Kentañ ar vro, he doa ranket kevrediñ gant an Islamourien evit bezañ dilennet.

Emañ Taslima Nasrin bac'het en he ranndi, gwarezet -pe dindan evezh-ar bolis 24e/24e. Ne c'hell mont kuit nemet gant ur c'harr da di e vignoned diogelañ. En he 32 vloaz,

"Gwazh eget ur c'hast eo hi," eme Vaulana Azizul Haque, ar mullah en deus galvet d'he lazhañ. "Goulenñ a ra frankiz ar c'hourzh. Eviti, mar gall ur paotr kaout peder gwreg e tlefe pep plac'h kaout pevar gwaz. Hag a-raok ar vuhez-pried zoken e lavar e tlefe ar merc'hed gallout mont gant meur a baotr. Enep ar c'horan hag Allah eo kement-se. Pec'hed eo!"

### Ar Fatoua ha priz Ananda

Pennoù ar gouarnamant hag ur vegennig eus kefredourien ar vro a c'hoarzh goap ouzh ar yoc'hstlenn estren a daol pled ouzh an dimezell Nasrin abaoe m'ez eus bet galvet d'he lazhañ hepken. Lod all o deus aon e vefe diheñchet nerzhioù ar vroad hag evezh an estrenien diwar kudennoù don ar baourentez hag an isdiorren war-du d'aeloù a-zivout ar rev, ar Frankiz da gomz hag an diazezelourien islamat.



# Al leaned e penn an Emsav e Tibet TESTENI BHAGDRO

Deuet e oa , e derou ar bloavezh, Bhagdro, ul lean a Dibet, da embann dirak ministred ar Foreign Office e Londrez ne oa gwir ebet evit mibien an den e Tibet. Hervez ar gargidi-hont e vefe diwirvoudel cheñch penn d'ar vazh avat.



Abaoe c'hwech vloaz, pa adkrogas da vat ar stourm evit dieubidigezh Tibet, ez eo al leaned a zo e penn an diarbenniñ. Deuet eo al leandiù da vezañ kreizennoù ar rendaeloù politikel. Bhagdro, mab d'ur c'houer, a yeas da leandi Ganden pemp bloaz zo, pa oa 17 vloaz: "Ma familh a oa eus un takad paour, lec'h na oa skol ebet. Komzet em boa ouzh leaned a oa eus Ganden ha gouzout a raen ne vane nemet un nebeud leaned eno. Santout a ris e oa ma dlead mont ganto."

E 1988 e nac'has leaned Ganden kemer perzh e gouel ar Mon Lan, an darvoud pennañ e bloavezh Tibet hag ur pezh kaer evit an douristed a zegas berniadoù dolaroù, hag ez ejont a-raok en ur c'houlenn frankiz ar relijion.

Ar velestradurezh a gasas kirri-boutin d'al leandiù da zastum al leaned ; met pa ne zeuas ket a-benn e lakaas pennoù al leaned en arvar da vezañ skarzhet. Asantiñ a reas al leaned, met e dibenn al lidadeg e savjont klemm. "Tibet digabestr a groajomp da ganañ, ha ni pegañ an tan e stallioù ar Sinaiz. Diouzhtu e voe bannet bombezennoù daeraroù en engroez hag an arme a dennas war ar vanifesterien... Skoet e oan bet em zroad peogwir e welis e vanke lodenn a-dreñv ma botez hag ar gwad a ziverade diouzh ma seul. D'ar poent-se e oa leun ar blasenn gant soudarded. Dont a ris a-benn da dec'hel."

### Un argad nevez

Hogen Bhagdro a oa bet filmet o vannañ mein d'al luc'hskudenne-

rien sinaat. Mont a reas da guzh da Lhasa, gwisket e plach. Goude miz ez eas da di e dud met paket e voe gant ar bolis en Ebrel 88. Dalc'het e voe 10 miz en toull ha jahinet evit ma rofe anvioù pennoù al leaned emsavet ha re ar skoazel'erien estren. E Genver 89 e voe barnet gant 5 lean all, tamallet

a vezañ renet ur vanifestadeg ha lazhet ur polis. N'o doa an damallidi gwir ebet d'un difenn lezennel, ha diazezet e oa an tamalloù diwar ar pezh o doa anzavet pa oan dindan jahin. Unan anezho, Lobsang Tenzin, a oa barnet d'ar marv, a voe troet e gondaonidigezh da vac'hidigezh da viken. Tri bloaz toull a voe evit Bhagdro.

Er vach e voe lakaet d'ober kofmoan ha jahinet a-daolioù tredan. Skoet e veze gant ar brizonidi. Ur paotr yaouank a varvas diwar ur goulid diabarzh. Bhagdro a voe laosket en e frankiz en Ebrel 91 hag en deskin e oa bet skarzhet diouzh al leandi. Ar brizonidi all o doa e-gendrec'het da dec'hel da India e-lec'h klask mont gant hent ar politikerezh e Tibet. E ergerzhadenn da Nepal a badas daou viz hanter-gant ar boan a rae e stomok hag e zivgell n'helle mui bale buan.

Evit ar gouarnamant saoz avat ez eo a-bouez-bras gwareziñ an darempredoù kenwerzhel mat a zo gant Sina. Ha pa emañ Sinaiz o prientiñ un argad nevez ouzh emsav dieubidigezh Tibet e kuzh ar Foreign Office a-dreñv e savboent : "D'wirvoudel eo dieubidigezh Ti-

bet. ■

### DISKOUEZADEGOU

■ "Skritleoù Penn-ar-Bed" e vo danvez un diskouezadeg kinniget e Mirdi Breizh e Kemper. 85 skritell eus dibenn an 19vet ha penn kentañ an 20vet kantved, o vrudañ Penn-ar-Bed d'an douristed pe o kemenn darvoud pe zarvoud en departamant. Mirdi Breizh, straed ar Roue Grallon, 29000 Kemper, pg. 98.95.21.60.

■ D'ur skritellour lituanat eus Pologn, Stasy Eidrigevicius, e vo gouestlet diskouezadeg an nevez-amzer e Skritellaoueg Breizh, e Lokornan. Un arzour brudet eo "Stasy", anavezet evit bezañ skeudennaouet levrioù evit ar vugale hag evit bezañ savet skritelloù c'hoariva. Ur priz en doa bet e Pariz e 1993 evit bezañ savet "ar skritell wellañ er bed". Skritellaoueg Breizh, Maner Kergwenole, 29180 Lokornan, pg. 98.51.80.59.

■ Adalek an 23 a viz Ebrel ha betek an 31 a viz Gouere e vo tu deoc'h mont da welet un diskouezadeg anvet "C'hwec'hioù ha Blazou" e Kastell Trevarzh, diwar-benn an te, ar c'hafe, ar c'hakao, an ispisou a bep seurt.

■ Un diskouezadeg diwar-benn Langleiz, livour ha skeudennaouer, a vo e Kastell Trevarzh ivez, etre ar 15 a viz Mezheven hag ar 15 a viz Eost. Bez' e vo an diskouezadeg vrasañ zo bet biskoazh diwar-benn an arzour breizhat-se, eus ar "Seizh Breur".

## KELAOUENN Breizh gant ar minitel

Keleier berr  
Gouelioù ha festoù noz  
Stajoù : sonerezh, koroll, brezhoneg  
Chomlec'hioù, titouroù a bep saurt  
Levrioù nevez embannet  
Skol Uhel ar Vro

Keleier  
e brezhoneg  
hag e galleg

Kasit keleier deomp :  
☎ 99.87.69.12 • Faks 99.63.82.28

**3615 KELA**



**Pennad-koaz gant Naig Gars ha Martial Menard**



Digorañur ofisiel TI LIN e Kemper gant diennidi hag an dud o deus kemeret perzh el labour kempenn

**LIN... Petra eo ?**

Ijin zo ur c'hevredad bet savet ganimp da vare nevez-hañv 1992, da heul an dilennadeg rannvro a oa bet e-miz Meurzh. Da neuze e oa en em vodet un toullad brav a dud dindan anv ar P.B.P.E. evit mont war ar renk. Daoust d'an disoc'hioù fallik a-walc'h a oa bet, dipitus zoken, ez eus bet tud na fellas ket dezho distreiñ d'ar gêr hep mui, rak ur pal a oa bet tizhet evlket : bodañ tud evit kenlabourat. Hag evel-se eo bet savet ar c'hevredad Ijin, dezhañ da bal labourat war dri zu : sevenadur, armerzh ha politikerezh, kement-se war Kernevel.

**Petra hoc'h eus graet betek-henn ?**

Goude bet savet ar c'hevredad ha diazezet e dachenn labour, hor boa kroget da embann ur gazetenn anvet Kerne-Infos, eizh pajenn dezhi, o kelaouiñ an dud war ar pezh a c'hoarvez er vro war ar tachennoù a labouromp warno. Eizh niverenn zo bet embannet, hag ur benveg a bouez eo deuet da vezañ dre ma vez lennet gant forzhik tud. Roet hon eus lañs ivez da Saloñs Liesyezhek al Levrioù Bugale, a vo dalc'h bet bloaz. Buan avat, hor boa merzet, e vefemp kalz efedusoc'h m'hor befe un ti. Gouzout ervat a ouiepp ne vefe ket roet hini ebet dimp. Gant-se enta, hon eus savet ur c'hevredad keodedel diloc'hel anvet «Kreizenn Ijin» ha gwerzhet lodennoù 500 L evit dastum arc'hant a-walc'h da

brenañ un ti. Ur brestadenn hon eus graet er bank evit peurdokañ ar bern ha bet hon eus ur skoaziadenn digant an departamant evit al labourioù kempenn. An ti zo bet prenet e miz Mae 1993 ha digoret eo bet er miz tremen. Daou rannidi hon eus kempennet ivez hag ar feurm anezhañ a ya da restorel an amprestadenn.

**Petra a vo graet er greizenn ?**

Evel-just e talvezo da gentañ-holl da Ijin, evit he emvoudoù, met feurmet e vo ivez d'ar c'hevredadoù all o defe ezhomm.

A-hend-all e vo tu da gejañ ouzhimp da lun, da veurz, da wener ha da sadorn.

Ur raktres diabarzh zo ivez : krouiñ un doare preti kevredadel, ma c'hello izili Ijin hag an dud pedet ganto dont da bredañ d'ar gwener da noz. Digor e vo ivez d'ar re o deus kemeret ur gartenn-skoazell. En Euskadi o deus tiez evel-se ha mat-kenañ ez eont en-dro.

**Pegement a izili zo ?**

Evit ar mare emaoimp un hanter-kant bennak a izili ha tost da vat kement all a skoazellerien. En tu all d'an emsaverien omp ivez deuet a-benn da sachañ tud nevez. Moarvat e teuy tud all goude, dreist-holl dre ma vint bet lakaet d'ober anaou-degezh ganimp gant ar predoù boued. An izili skoazellerien ivez a gresko an niver anezho, ha tamm-ha-tamm, e teuint da emezelañ da vat.

**Hag an dazont ?**

Raktresoù zo ganimp a-leizh, n'eo ket kement-se ar mennozhioù a ra diouer, an amzer d'o c'has da benn an hini eo ! Roet e vint da c'housout dre m'o lakaimp war-sav. Evit ar mare, goude daou vloavezh e c'hellomp sellet ouzh hol labour kuit a vezh. An ti, ar gazetenn, ar saloñs, ul levr «Breizh-Europa». Kavout a ra dimp ez eo al labour lec'hel ul labour a bouez da ober, ha gwelet a reomp dija ne labouromp ket en aner. Spi hon eus en em vodo tud d'ober an hevelep tra e lec'hioù all. Kazetennoù lec'hel all a c'helle bezañ savet, ha bez' e c'hellfent bezañ egin ur «Breizh-Infos» a zo kement a ezhomm anezhañ...

Y.-V. T.

**Kemennadennoù**

**d'ar Sadorn 14 a viz Mae** da 2 e 30 goude kreisteiz gant Yvon LEON - Isabelle DERRIEN vo aozet ur staj dañs Fisel gant Kreizenn Roparz Hemon, (plasenn Verdun Gwengamp).

*Evit lakaat hoc'h anv, pellgomz d'ar :*  
96 44 27 88 adalek al Lun betek ar Sadorn etre 2e ha 6e abardaez.

**D'ar Sul 15 a viz Mae**, un devezh war ar maez a zo prient gant OALED ABHERVE, Kreizenn Sevenadurel Sant-Brieg : Gweladenn atant bevoniell Kerleor-vras dalc'het gant an aotour ar BAILH. Pik-nik holl a-gvet - baleadenn war hent plant ar «Périer».

OALED ABHERVE, 15 straed Frañsez Menez 22000 Sant-Brieg - Pellgomz : 96-78-37-13

**Radioioù Sant-Brieg** : Abaoe miz Ebrer eo bet hiract pad an abadenn «**Kig-ha-fars**», a c'heller klevet bremañ eus 4e30 betek 5e30 d'ar Meurzh d'abardaez war gwagennoù Radio-Sklaerder. Sant-Brieg 100.6, Lannuon 102.10).

War COB FM (Sant-Brieg 97.2) e vez kaset un abadenn vrezhonek nevez, «**Startijenn**», eus 5e00 betek 6e00 d'al Lun d'abardaez.

**D'ar Gwener 6 a viz Mae** Beilhadeg da 8e30 noz aozet gant an Oaled Abherve : Iffig Troadeg, Marthe Vassalo, Fulup Ribault/bouzouki, ha Nanda Troman.

**Abadennoù kinniget gant Park an Arvorig**

**D'an 28 a viz Mae : da 2 e 30** vo Tro ar micherioù kozh e Argol ha diviz gant an dud. Park Naturel An Arvorig e Menez-Meur - B.P. 35 Hañveg - 29460 Daoulaz Pelleiler 98-21-92-85

**Piv a yelo da Speied ?**

**Eus an 20 d'an 22 a viz Mae** Evel bep bloaz e c'hello kemer plijadur e Gouel ar Brezhoneg e Speied ar vrezhonegerien ha mignonned ar brezhoneg o tont eus peb korn eus ar vro gant abadennoù a bep seurt, c'hoariva, festoù-noz ha kement a zo.

T.A.B. a ginnig deoc'h feurmiiñ un ti e Speied evit ur strollad tud. Rannet e vo ar frejou etre an holl. Evit kaout muioc'h a ditouroù :

Loic de Châteaubriant 49, rue Montorgueil 75003 PARIS - Pgz. : (1) 42 33 39 38 pe Ti ar Brezhoneg - pgz. : (1) 43 64 63 33

**TRO MENEZ ARE 1994**

**D'ar yaou 12 a viz Mae** adalek 7e30 m'intin e Brasparzh (29)

**Tro-vale "Kened Ouez"** Aozet e vo an devezh hervez troiadoù 10, 15, 20, 30 pe 40 km, pep hini o vont diouzh e varregezh hag e c'hoant. Ur prof a vo evit an holl berzhidi.

Goude bale e vo un arvest digoust da 4e gant Annie Ebrer - Nolwenn Le Buhe ha Bagad Montroulez - da heul, Viktor Tromeur hag e akordeoñs ha-Bugale Diwan.

KOAN : Servijet e vo koan ("Keustereunn ar Menez") adal 6e abardaez.

**Ha klozet an devezh gant ur FEST-NOZ BRAS gant BLEIZI RUZ**

Kanerien Brasparzh Jouin - Le Roux - Prada A. Ebrer - N. Le Buhe Poho - Le Goffic

Mont a ra ar gouñid da SKOL DIWAN KOMMANTA  
**Titouroù : 98.78.09.33.**

**Vakañsoù en Iwerzhon**

Ar gevredigezh Breizh-Iwerzhon a ginnig d'ar re o defe c'hoant ur veaj da Iwerzhon e miz Mae. Pemzektez e pado an drolad-se, etre an 13 hag an 29 a viz Mae. Mar fell deoc'h kemer perzh er veaj, e rannik lakaat oc'h anv en ur skriveñ pe en ur bellgomz da Baolig Montjarret, "Breizh-Iwerzhon", 56270 Planvour, pg. 97.86.33.73.

**Mont war vor e brezhoneg...**

Da vare Yaou Bask, eus an 12 d'ar 15 a viz Mae, e kinnig deoc'h T.A.B. mont war vourzh ar "*Belle Germaine*", ur vag-pe-sketa dre lien savet e 1937 a-benn dizoloñ lennvor Vrest hag an inizi (Molenez, Sun, Eusa).

Pep hini a c'hell dont : n'eo ket ret gouzout an doare d'ober war vor.

Plas a zo evit dek den. Kousket e vo e-barzh ar vag. Dilhad tomm a ranker kaout.

Kousta ar raito 1000 lur evit pep hini (*feurm ar vag, boued ha frejoui-hent*).

Pep hini a ranko bezañ war vourzh d'an 12 a viz Mae, tro 10 eur e Brest (Porzh Milin Wenn).

Evit kaout muioc'h a ditouroù : Michel BAUD 5, rue de Montrouil 94300 VINCENNES - Pgz 43 28 59 54

**Glask zo war...**

O prientiñ un diskouezadeg war René-Yves Creston (1898-1964) emañ mirdi Sant-Brieg.

Glask a zo eta war gement pezh arz bet krouet gant an arzour-mañ, Liesseurt-kenañ eo bet e oberenn ha strewet eo bet e oberennoù.

*Anaoudek-bras ouzhoc'h e vefe mirdi Sant-Brieg mar gallfec'h reiñ da anavezout oberenn pe oberenn chomet dianav pe nebeut anavezet betek-henn.*

Ho trugarekaat evit mont e darempred gant Mirdi Sant-Brieg Michel CLEMENT - BP 65 - 22023 St-Brieg Cedex © 96.62.55.20.

**Fest-noz U.G.B.22**

**Dalc'het e vo fest-noz bloaz** an U.G.B. 22 (Unvaniezh ar Gellennerien Brezhoneg) d'ar Merc'her 11 a viz Mae e Pederneg. Kaset e vo an abadenn en-dro gant ar strolladoù, ar sonerien hag ar ganerien da heul : Retrait de Permis ; Morvan hag e gomper ; Troadeg tad ha merc'h ; Robin / An Intañv/Suignard, Nikolazo hag e gomper. Deuit a garradoù !

**Breizh - Kroatia**

**Ur fest-noz a vo aozet** gant ar gevredigezh Breizh-Kroatia-Bosnia-Herzegovina e Brest, e Sal an Ti-Kêr, d'ar merc'her 11 a viz Mae. Eno e vo ar Bleizi Ruz, Falc'hun ha Bozev hag ar merc'hed L'Hour.

**Klas Glas ar Chapel Nevez**

**Ur staj fonnu** war ar brezhoneg komzet a zo kinniget deoc'h gant Skol An Hanternoz ha Kreizenn Klas Glas Ar Chapel Nevez adalek ar Yaou 5 betek ar Sul 8 a viz Mae 1994.

*Pal :* mont war-raok gant ar brezhoneg komzet.

Gallout a rit dont nemet adalek ar Sadorn da 2 eur (priz : 350 pe 250 Lur).

*Skritv da :* Kreizenn Klas Glas 5 Hent an Dachenn Sport 22160 Ar Chapel Nevez N° Pellgomz : 96.21.60.31

**Staj e Amzer-Nevez**

Aozet e vo gant kevredigezh Stumdi hag Amzer Nevez ur staj Brezhoneg adalek ar 16 betek an 20 a viz Mae 1994. Dalc'het e vo ar Staj e Amzer Nevez. Tri live a vo evit ar staj-mañ Distaolioù evit ar studierion, an dud dilabour ha kerent skolioù Diwan.

Goulenit titouroù da : Stumdi 12, straed Penn ar Wern 29450 Kommanna © 98.78.00.46 pe Amzer nevez Soyé 56270 Planvour © 97.86.32.08.

**Embann**

**Gouelou, Un tamm digor d'ar brezhoneg skrivet**

O paouez embann ur gemenadenn emañ "La Presse d'Armor" kazetenn Bro-Oueloù. Prest eo da lakaat brezhoneg war he fennnoù. N'ho po nemet kas un droidigezh gant ho pennad. Un hanter bajennad eus ar gazetenn zo aet gant ur pennad o vrudañ DIWAN c'hoazh. Gourc'hemennoù d'ar gazetenn eta, gant ma pado!

Kasit ho skridoù da :  
**"La Presse d'Armor", SAPIA B.P. 12 Pempoull-Cedex 22501**

**GERIADUR KERNEVEG**

Un nebeut mizioù zo e teuas er-maez ar "Gerlyver Kernewek Kemmyn", ur geriadur kernevek savet gant Ken George hag embannet gant Kesva an Taves Kernewek. Ur geriadur diazez bihan a-walc'h eo heñañ, 9000 pennger kernevek ennañ, hogen talvoudus-tre e vo d'an holl re zo dedennet gant yezh Kerneveur du-hont pe en tu-mañ da Vor Breizh, dre ma ro evit pep ger ur meneg eus ar skridoù ma vez kavet, e zistagadur, e droidigezh e saozneg, hag ar gerioù kar dezhañ e brezhoneg hag e kembraeg. Sikouret e voe embann al labour-se gant KumuniezhEuropa. ■

**LEVR BOURZH BEAJ KENTAN KRISTOL GOULM**

Deuet eo er-maez, a-benn ar fin, troidigezh levr-bourzh Kristol Goulm, lakaet e brezhoneg gant Filip Oïllo. Ur skrid testiñ eo levr-bourzh Kristof Goulm, a gont deomp "kavidi-gezh" Amerika e 1492. E penn kentañ al levr e kaver displegadennoù puih diwar-benn Indezidi Amerika, diwar-benn "kavidi-gezhioù" ar c'hevandir-se, diwar-benn deizlevr Kristol Goulm ha diwar-benn dibaboù yezh F. Oïllo, ha goude-se emañ ar skrid end-eeun : lodenn

gentañ al levr-bourzh. Daoust hag un eil lodenn a vo ? ■

**PLADENN SONEREZH HENGOUNEL**

Laouen eo Kuzul Skoazell Diwan Brest da ginnig deoc'h ur bladenn sonerezh hengounel da vezañ gwerzhet evit Diwan.

Ur gerig war ar bladenn-mañ. Gouestlet eo da "Bastian ar Soneur", ur soneur bombard eus ar re wellañ a oa o seniñ e penn kentañ ar c'hantved, e Plouie. Dastumet eo bet tonioù ar soneur-mañ gant Paolig Montjarret hag e-giz-se en deus bet tro Herve ar C'hamm, mab-bihan Bastian, da embann ar bladenn-mañ. Daou soneur eus ar re wellañ eo a son war ar bladenn : Yann Baron ha Kristian Anneix.

Pal Herve ar C'hamm a oa enoriñ e dad-kozh evel-just, met ivez reiñ sikour da Ziwan : an arc'hant dastumet en ur werzhañ ar bladenn a vo roet da Ziwan eta. Siwazh eo aet Herve ar C'hamm d'an Anaon, a daol-trumm, e fin ar bloaz tremenet. E vab eo eta, añvet Herve eveltañ, a fell dezhañ kenderc'hel oberenn e dad. Setu penaos eo bet kinniget deomp e vefe gwerzhet ar bladenn-mañ evit gouind Diwan.

Neuze, e c'hellit prenañ ar bladenn-mañ e pep skol Diwan pe en ur skrivañ din (Dominig Chorlay, Kerourin, 29280 Plouzane, pellgomz 98.45.08.83) pe c'hoazh en ur skrivañ da Herve ar C'hamm (hent Kan an Avel, 29263 Lokmaria-Plouzane). Ar bladenn a vez gwerzhet 120 lur + 5 lur mizou-kas. ■

**lennit** **al liamm**

Skrivañ da **al liamm**  
**16, stared des Fours à Chaux**  
**35400 Sant Malo**

Koumanant bloaz : 150 lur  
(studierien, tud dilabour 100 lur)

**«LAVARET EUROPA»**

Embannet ez eus bet ul levrig 40 pajenn gant ar "Burev evit ar Yezhoù Nebeutañ Implijet" anvet "Parler l'Europe". Kinniget brav eo, gant tresadennoù bev e liv. Bez' eo an hini kentañ eus ur rummad da zont anvet "Langues Vivantes".

Danvez al levr eo an divyezhegezh, e bal o vezañ broudañ an dud da gas o bugale d'ur skol divyezhek ma kelenner en ur yezh "vihanat" pe o broudañ da zeskiñ o-unan ur yezh wasket - pe "regionale" pa lavarint mat. Gant ur Gembreadez eo bet savet hag embannet eo (e vo) en holl "yezhoù bras" Kumuniezh Europa. An droidigezh c'hallek zo bet graet war he zro gant ur Vretonez. Deuet eo brav gant ha pa c'hellfed santout c'hoazh blaz ar saozneg war frazennoù zo a-wechoù.

Ur rebechig marteze : n'eo ket bet azasaet a-walc'h ar skrid ouzh "kevredigezh ar c'hwec'hkorn". Anat eo dre ar skouerioù : kalzik anezho o tennañ d'ar relijion. "Nous parlons poliment au prêtre et familièrement au chien", ha pelloc'h "la sauvegarde de l'identité culturelle religieuse". Ar re o deus bet darempredoù gant Kembreiz a anavez aze unan eus perzhioù pennañ o dibarded sevenadurel.

En un doare efedus, dre rannbennadoù niverus ha berr-tre e tispaket deomp arguzennoù gouest da gendrec'hiñ an dud eus perzhioù mat an deskadurezh divyezhek.

Ul levrig helenn ha dedennus eta a c'hellit lakaat etre daouarn o mignoned diskredik. Saludomp neuze obererezh ar Burev Europat. Un drañt hegasus 'm eus kavet koulskoude : goude kement a don roet d'an divyezhegezh eo bet lakaet ar stourm evit hor yezhoù hag hor gwirioù da eil renk. D'am soñj ez eo an divyezhegezh ur benveg, ur stad eus ur gevredigezh e-pad ur mare resis eus an amzer. Ne c'hell ket bezañ ur pal. Ar brezhoneg eo ar pal. Diwallomp da goll poell hor c'hudenn. ■

F. Jakez ha I. K.

**GERIOU DA ZIZOLEIÑ gant Mich BEYER**  
Gael niv.15

1			
2			
3			
4			
5			
6			
7			
8			
9			
10			
11			
12			
13			
14			
15			
16			
17			
18			
19			
20			



Ha setu Lipouzenn nijet war-zu an hanternoz ! E Lituania he deus tañvaet kaletez anvet koldunai. Setu an doare d'o fardañ.

**Evit an toaz :** meskit bleud, l meudad hollen hag l vi gant dour. Ret e vo d'an toaz bezañ gweeun. Ledit an toaz ha stummit : rontou ennañ gant l volenn.

**Ul lizherenn da gemm bep tro**

- 1 - Enezjad.
- 2 - Enni emañ ar stêr.
- 3 - Diviz.
- 4 - Diwallit, tomm eo !
- 5 - Plant a Leon.
- 6 - Skaf.
- 7 - Poan a chell degas.
- 8 - Enebour al liorzhour.
- 9 - Mignon an harvoud.
- 10 - Genou a oar tulañ tan.
- 11 - An hevelep hini evit an holl !
- 12 - Moneiz.
- 13 - Evel-se e vez ur gwir mignon.
- 14 - Den a feiz.
- 15 - Krech.
- 16 - Dañvez bouc'hilli gwec'hall.
- 17 - Perzh Mab-den, a lar-en.
- 18 - Kredenn.
- 19 - Kan an nevez-hanv.
- 20 - Danvez loeroù cheuch.

**Diskoulmoù gael niverenn 13 :**

- A-led :*
- I. Geriahudur. - II. Avu ; ne ; isu. - III. Lizidour. - IV. Idol ; eta - V. Afganistan. - VI Ni ; OO ; ke. - VII. Enebourien. - VIII. Rok ; nn. - IX. Edoù ; ac'hane. - X. Disleberet.
  - A-sarzh :*
  - 1. Gallianezed. - 2. Evi ; fin ; di. - 3. Ruzig ; eros. - 4. Ida ; boul. - 5. Andon ; O.K. - 6. Heolioù ; Ab. - 7. Soch'ore. - 8. Diret ; ar. - 9. Us ; takenne. - 10. Rubanennet.

En ho koldunai e c'hellit lakaat kig, togoù-touseg, fourmaj-laezh pe lus.

**Setu penaos ober gant kig :** en ur balarenn, lakaet da veleniñ gant amann un ognonenn troc'hed munut-munut ha kig draillhet (kig-moc'h ha bevin kemmesket). Lakaet hollen ha pebr ha meskit pep tra gant ur vi.  
Aozit ul lipig en ur balarenn vihan all, gant amann, ognon, hollen ha paprika.  
Ledit ul loaiad kig war an hanter eus pep kaletezhenn ha plegit an tu all war c'horre a-benn stummañ kornegennoù. Ret e vo moustreañ war bord pep korne-genn da virout ouzh ar c'hig da vont er-maez. Teurel ar c'holdunai en dour berv. Pa vezont poazh e savont war gorre an dour.

**Servijit gant al lipig. Mich**

**TAOLENN**

**BREMAN NIV. 152**

miz Mae 94 - 20 pajenn

Lizhiri	2
Lezenn Toubon	3/4
Adsav lezennel	5
Deskadurezh	5
Berr ha Berr	6
Berr ha Berr	7
Sivom ar Baol	8-9
Kurdistan	10
Kurdistan	11
Berr ha berr	12-13
Bangladesh	14
Tibet	15
Sevenadur	16-17
Sevenadur	17-18
Dudi	19
Gouel ar Brezhoneg	20

**Pennadoù gant** Herve Kerrain, Olier Ar Mogn, Yann Varc'h Thorel, Lena Louarn, Joel Donnart, M.K., K.a.D., Ronan al Louarn, Mich, F.Jakez, Martial Menard, P.D., G. ar C'helleg, Benead Lukian, Iwan Kadored, Daniel Kernalegenn, Dazont, Tangi Louarn.

**Skoazell difaziañ gant** Herve Kerrain, Olier Ar Mogn, Iwan Kadored.

**Luc'hskudennoù gant** Lena Louarn, O.F., Louis Blonce, L'évènement, Ronan al Louarn.

**Skoazell gant** D. Gratiet.

**Renerezh BREMAÑ : Lena Louarn**

**Skrivet e-barzh BREMAÑ !** Kasit ho pennadoù, gant skeudennoù, dreist-holl ! war baper, pe gwelloc'h **pladennig a-raok an 21 a viz Mae!** Trugarez deoc'h.

Koumanant : 200 lur ar bloaz, skoazell : adalek 250 lur ar bloaz.

**BREMAÑ,**  
8 ru Hoche,  
35000 Roazon, BREIZH  
Niverenn CPPAP 62974

# Gouel Broadel ar Brezhoneg

## 21 ha 22 a viz Mae 94

*Petra eo Gouel Broadel ar Brezhoneg ?*

- Gouel bras ar sevenadur hag ar stourm eo, o lakaat war-wel ar brezhoneg hag an implij a c'heller ober anezhañ bemdez.
- Ul lec'h ma teu ennañ kanerien vrudetañ Breizh ha re broioù all.
- Ur programm sonerezh hengounel hag arnevez.
- Ur sell war-zu ar sevenadurioù all. Er bloaz-mañ e vo ganeomp Kembreiz, Iwerzhoniz, ha Flandreziz.
- Gouren, sportoù ha c'hoarioù breizhek.
- Diskouezadegoù, sonerezh e-leizh ar vourc'h.
- Ul lec'h m'en em gav asambles ar re a vez bemdez ouzh ar stern war an dachenn sevenadurel ha politikel (150 metrad standoù).
- Ur gouel eo, ha n'eus ket par dezhi e Breizh. Tamm-ha-tamm e tenn da vodadoù bras Bro-Gembre pe Euskadi, an Eisteddfod hag an Erri-Eruatz.
- Ul lec'h degemerus dindan forzh peseurt amzer : 5 telenn vras ha 4 sal.

### D'ar Sadorn 21 a viz Mae

**etre 3e 30 hag 11e noz Fest-deiz**  
gant : Molybden

Gwern / Deredel, Le Corre / Kerjean, Castel / Burban, Le Corre / Hourmand, Bernard / Bizouarn, G. Konan / F. Piriou, Puillandre / Stervinou, Marius / Savidan, Riou / le Scoul / Madec.

**Iffig Troadec** hag **IDIR**  
adalek 9e noz  
e sal vras ar sportoù

**Da 10 e 30 noz : fest-noz gant**  
**DIAOULED AR MENEZ**  
ha

M. L. Fustec / B. Le Corre, Riou / Madec / Le Scoul, Puillandre / Stervinou, Talec / Leclère, Marius / Savidan, Iffig / Rose Troadeg.

#### **Oferenn deiz-ha-bloaz**

Oferenn Gouel Broadel ar Brezhoneg a vo lidet e Chapel Itron Varia ar C'harr d'ar Sul 22 a viz Mae da 2e goude kreisteiz, e koun ar stourmer **ALAN AL LOUARN (1918-1993)** (savet gantañ *Kreizenn Kelaouiñ Breizh*) ha **TANGI PEYRETOU (1972-1993)** (kelenner e Skol an Emsav, ezel eus **DAZONT** ha studier en Aotreegezh vre-zhoneg), o daou aet da Anaon d'ar 15 a viz Mae 93.

### D'ar Sul 22 a viz Mae

#### **adalek kreisteiz**

sonadeg er straed gant ur Bagad  
prejoù

1e.- konkour sonerien,  
c'hoari mel-droad,

da 2e g.K. gouren, c'hoarioù Breizh, standoù levrioù, pladennoù, oferenn e brezhoneg, diskouezadeg labour artizaned.

#### **Dindan an deltenn vras etre** **3e ha 10e noz**

Fest-deiz gant ar strolladoù  
Diroll, Bi-Kozh, Tud  
ha Nanda / Jakeza, sonerien  
konkour priz kentañ, sonerien  
konkour 2vet priz, Robin / Lintanf /  
Suignard, Urvoy / Malrieu, Gwern /  
Bizouarn, Castel / Burban, Gwern /  
Deredel, Lozac'h / Scraign.

**Er SPOT etre 3e 30 hag 8e noz**  
mouezhioù ar vro gant Patrik  
Marie, Jakeza Le Lay, Rommelpot,  
Mona Jaouen,  
Arnaud Maisonneuve / Marie-aline  
Lagadic, Annie Ebrel.

#### **Etre 3e ha 9e 15, dindan telenn**

Kabare gant Bush Plant (Iwerzhon),  
Taboulinou (strollad), Kerdin,  
Bottom Dogs, Bernez Tangi, Veillon /  
Riou, Soig Siberil / Mac Menemy, P.V.  
Kerloc'h, Rommelpot ha Djenn-Mô.

#### **Adalek 3e betek hanternoz** **ABADENN VEUR**

gant

Kern-E / Kristen Nikolas  
Gilles Servat  
gant An Triskell,  
Anhrefn (Rock Kembre)  
Alan Stivell

#### **Adalek hanternoz** **FEST-NOZ VRAS**

gant Skolvan

Lintanf / Robin / Suignard  
Ar Vreudeur Morvan  
A. Ebrel / M. Guillou, Veillon /  
Riou, Jakeza / Nanda, Coadou /  
Nollent / Kadoudal, Urvoy  
/ Malrieu  
Sonerien Konkour hag all...

#### **Kenstrivadeg kanaouennoù**

*Kenstrivadeg a vo evit Gouel Broadel ar Brezhoneg : sevel ur ganaouenn nevez e brezhoneg.*

1) kanaouenn da zañsal (20 da 30 poz)  
2) kanaouenn solo : 20 da 30 poz.  
Ur priz ispisial a vo evit an hini a savo ur ganaouenn diwar-benn Gouel Broadel ar Brezhoneg.  
Bodad barn ar Gouel en em vodo e miz Gwengolo a zeu.

#### **Diazezoù ar genstrivadeg**

- kanaouenn e brezhoneg  
- kanaouenn savet e-kerz ar bloavezh.  
*Chomlec'h :*

«kenstrivadeg sevel kanaouennoù»  
**Gouel Broadel ar Brezhoneg**  
**Presbital kozh 29530 Landelo**  
**Pellgomz : 98.93.93.08.**

#### **Ar Brezhoneg diazez** **hon sevenadur**

Ker e koust d'ar Vretoned lakaat renkañ ar mirdioù, ar c'hestell, ar manerioù, ar manatioù e peb korn ar vro. Un arouez eo aliesmat evit sevenadur o rannvro. Petra a vez graet evit ar Brezhoneg, brasañ kastell hon sevenadur ? Dister eo an arc'hant a vez gouestlet d'hon yezh.

Ne vo ket paret ar gouli gant arc'hant hepken. Dav 'vo d'ar Vretoned kaout youl da gomz o yezh eus an eil remziad d'egile.